



Kavet'peus da saout ?

Skrivet gant Paotr Treoure

Kavet'peus da saout'ta, Yannig ?
Kavet peus da saout ,ta ?
N'em eus ket, ne m'eus ket,
Gwelloc'h 'geto 'm'eus kavet.

Petra peus kavet'ta, Yannig ?
Petra peus kavet'ta ?
Un neizh pig, un neizh bran,
Hag un neizhig laouenan.

Petra `zo enno `ta, Yannig ?
Petra `zo enno `ta?
Ur vi ruz, ur vi gwenn,
Unan glas, unan melen.

Ro unan din-me ,ta, Yannig,
Ro unan din-me ,ta !
Ne rin ket, ne rin ket,
Ar re se `zo `vit ma gwreg.

Peseurt gwreg az peus `ta, Yannig ?
Peseurt gwreg az peus `ta ?
Unan vihan, unan vrav,
Hag unan a sav mintin atav.

Peseurt soubenn ra'ta, Yannig ?
Peseurt soubenn ra'ta ?
Soubenn pesk, soubenn fresk,
Soubenn vijil alies.